

### Ar ribot.

Pell a zo Jannedik c'hwi voa klask an tu  
da dougen ar simallen ag ie ar c'hrep du  
mes breman heus eureuget eun den a voad huel  
Grouiet(1) ar mab a garo c'hwi dougo ar c'habel

— Penos eta Jannedig n'ouzoc'h ked ar c'hallek  
Da kozeal en kareos ous an dimezellet  
N'ouzoc'h ked ar gallek ken eubeud ar kadanç  
Na ne ket en brezonnec a koze an noblanç.

Me mei mo eur vates vien ag a ouio gallek  
a kozeo ewid on kent a meo disket  
Am gouisko ma diwisko a lardo ma boto  
ag em lakeo da kousked deus o koste otro

Neun kad a janned brezez(2) mond a ra dar vereri  
C'houantad a ra lez ribod ne ve ked roet dezi  
ag o vond an otro wid diskoel voe goell pot  
ag gant eu(n) ten pistolen o terri ar ribot

Klasket voa tud a justic dober procès verbal  
a balamour dar ribot torret ag al lez voar an douar  
Kousket(3) e bed dan otro wid diskoel voa goel pot,  
prenan eur ribot newe en plaç eur koz ribot.

(1) *Peut-être faut-il lire : groniet ?*

(2) *Ms : breze ; lire : brazez.*

(3) *Ms : kousket ; lire : kousket.*